

€ koun

Jakez Kerrien...

Chomet eo Jakez Kerrien e-giz ul luc'hedenn e bed al lennegezh vrezhonek. Paotr ul levr nemetken eo bet betek bremañ. Kentañ levr embannet gant Gwalarn eo bet *Ar Roc'h Toull* e 1926, embannet eo bet 5 gwech dija ha troet e galleg, ar pezh zo rouez evit ur skrid brezhonek ha deuet da vezañ ur c'hlasik eus hol lennegezh.

Kant vloaz zo eo bet ganet *Gwalarn* diwar youl un den, Roparz Hemon. Nebeut a dud a oar eo bet soudard Louis Nemo (anv badez Roparz Hemon) gant Jakez Kerrien. Ha pa oa ar Brestad o poaniañ da beurzeskiñ brezhoneg en deus kavet harp gant Kerrien evit gwellaat e anaoudegezh eus ar yezh.

Jakez Kerrien a oa brezhoneger a-vihanik, ganet e Sant-Tegoneg, gantañ ur yezh-vamm c'hwek ha tost mat eus dibaboù ar yezh standard.

Poent 'oa d'al lennerien vrezhonek kaout un tañva eus holl skridoù Jakez Kerrien. A-raok *Ar Roc'h Toull* en doa bet tro da sevel barzhonegoù, danevelloù ha zoken ur pezh-c'hoari dianav-krenn d'an dud dre ma oa bet embannet a dammoùigoù e *Breiz Atao*, ur gelaouennig diaes da gavout el levraouegoù zoken.

Breiz Atao, Gwalarn, Feiz ha Breiz, Courrier du

Finistère, Union maritime et agricole, Kroaz ar Vretoned, strewet eo e skridoù en holl gelaouennoù brezhonek pe divyezhek eus ar mare-se.

Strobañ anezho, dilaouiñ anezho, prientiñ anezho setu ar gefridi bet fiziet ennomp gant *Al Liamm* : Mari Lubrano, Yann-Erwan Abalan ha me hon eus sammet al labour-se gant ur gwir blijadur ken pinvidik emañ yezh Jakez Kerrien ha gant ar spi ivez lakaat al lennerien vrezhonek da zizoloïñ ur re skridoù dianav dezho.

Kerrien e-pad e brantad strujus evit al lennegezh vrezhonek zo bet o chom e meur a lec'h : Gwened ha Düren (Bro-Alamagn) e-pad e amzer soudard, Miranda de Ebro (Bro-Spagn), Masnuy St Pierre (Bro-Velgia), Roma (Bro-Italia) e-pad e amzer deskard ha Chateaudun ha Poitiers (Bro-C'hall) e-lec'h m'eo bet war e vicher kelenner war ar brederouriezh.

Evit heuliañ mat e hent hon eus kavet un teñzor : un hanter-kant lizher bet skrivet d'e gamarad Youenn Drezen. Enno ez eus tri danvez a bouez o deus sachet hon evezh :

- Da gentañ, ar c'henlabour da vestroniañ ar brezhoneg etre Jakez Kerrien, Jakez Riou ha Youenn Drezen, an tri c'hrennard o doa graet o studioù asambles e Bro-Spagn etre 1911 ha 1919.

- D'an eil, ar vignoniezh don etrezo, ur vignoniezh aet war goazhañ gant an disparti buhez etre an daou gomper kernevat chomet e Breizh hag ar beleg leonat chomet sonn war e feiz.

- D'an trede e weler penaos eo bet diaes-kenañ da Jakez Kerrien ober e zibab etre e garantez-vro hag e

garantez Doue : « Re am bije karet ar brezhoneg » en deus disklêriet da Baskal Rannou. Ur gomz heverk eus e zibaboù.

Ur rummad lizheroù fromus a binvidika kalz an anaoudegezh hon eus eus mare krouidigezh *Gwalarn*. Rak Jakez Kerrien a oa ivez e darempred gant Yann-Vari Perrot, Frañsez Vallée, Meven Mordiern, Roparz Hemon, Louis Dujardin... pennoù-bras an Emsav sevenadurel eus ar mare-se.

Gant al levr-mañ e roomp da baotr Sant-Tegoneg e wir plas e bed al lennegezh vrezhonek.

Bernezh Rouz

BARZHONEGOÙ



An Harluet

Na trist eo, siwazh, planedenn
An dud harluet diouzh o bro !
O ! lavarit holl ur bedenn
Evit ma vezint prest distro !

Setu, e-kichen ar mor bras,
Harpet oc'h ur garreg teñval
Un den, hag eñ yaouank-flamm c'hoazh
Bec'hiet e galon, du e dal.

Sell' 'ra a-wechoù du-hont pell
Lec'h ma tiskenn an oabl er mor
Hag e huanad a vouezh izel :
« Peur c'hallin-me mont d'an Arvor ? »

Gant ar brezel, harzoù Bro-C'hall
A zo morailhet a bep tu :
« Didalvez e vezo va mall
Ma na vez ar brezel echu. »

Hag e-kreiz trouz bras ar mor don
E kredas klevet ur vouezhig
A lâre : « Trist eo da galon,
Met laouen e vezo prestik. »

Hag an Harluet, koulskoude,
A chom teñval e zaoulagad :
« Ar brezel garv ; gwazh a se,
Ne echuo ket c'hoazh moarvat... »

Pegoulz 'welin-me Penn-an-Nec'h,
Kougn-douar benniget va Bro ;
O ! pegoulz 'welin-me al lec'h
M'on ganet ennañ pell a zo !

Ar gwez pin, e pere e c'hwezh
Trist an avel e-pad ar goañv
Pegoulz adglevin-me o mouezh
A vo ken flour da'm c'halon glañv ?

Avel, ma c'hwezhez war-zu Bro
An Harluet a leñv amañ,
Kas an tenerañ kenavo
D'e vamm a c'hortoz anezhañ.

Kenavo da'm ziig gwenn koant
Damguzhet e-touez ar gwez fav,
Hag am bije kement a c'hoant
Da welet ur wech c'hoazh... Kenavo !

Da bep gwenojennig laouen
On tremenet enni gwechall,
D'an heñchoù leun a sklêrijenn
Darempredet ganin keid-all,

D'ar parkeier ha d'ar prajoù
D'an draoñienn Toull-Sac'h glas atav

D'ar balaneier, d'ar c'hoajoù
D'ar gwaremmoù lann, kenavo !

Che ! setu aze traoù iskis...
Fallgaloniñ ! nann, nann, biken :
Ur Breizhad on, hag ar Vreizhiz
O deus fiziañs betek ar penn.

Heñvel int ouzh derv o bro
A chom atav uhel o fenn
E-kreiz ar barr-amzer garv
Ha don, difiñv o c'hant gwrizienn.

Ha me, abalamour m'on pell ;
Diouzh ar Vro e-lec'h m'on ganet ;
N'on ken bugel a Vreizh-Izel
A red he gwad em gwazied ?

Sav da benn, Harluet, gant feiz,
Bez fiziañs betek ar marv :
Rak adgwelet a ri da Vreizh,
Adgwelet a ri da Vamm-Vro !

Breizh adkavet

Abaoe 'm eus adkavet va zud, va yezh, va bro
Hag askoulmet liamm ar ouenn start betek ar marv,
'M eus plijadur o soñjal en harlu ken garv.

An-harlu-se ! Ni, mibien da Vreizhiz, hir o blev
A soñje gant lorc'h da Vro-C'hall, 'blege dindan he yev
Foll gant he Sevenadur, he levrioù, foll ha meyv.

Hor Yezh ne oa ket ur marsoñj en hor penn,
Hor bro nemet un hunvre goloet a vrumenn
Keid-all e oamp aet diwar roudoù klodus ar Ouenn.

Dianaoudek 'vel ma oamp war pezh a sell ouzh Breizh
Penaos e teuas an tan da gregiñ en hor c'hreiz,
D'en em ledañ ken ne ro paouez na noz na deiz !

Mouezh ar mor an hini eo ; mouezh glac'harus ar mor
A zigoras hor spered da soñj bro gañv Arvor.
O mor ! d'an hunvreoù brav te eo 'zigor an nor !

Damc'hourvezet war ar yeot*, e c'hwezh vat ar bleunioù
Ha luskellet hor spered gant kan an houlennoù
Ne loske hor soñjoù da vont da vro ar pardonioù.

Hag a-wechoù 'gave deomp e klevemp o sevel
En-dro da Vreizh mouezh ar mor kreñvaet gant an Avel
Evel mouezh ur vamm a gan 'n ur luskell ur c'havel.

Hogen piv a lâro din, piv a ziskouezo splann
Perak e red evel-se etrezek bro e vamm
Soñjezon an harluet pa vez skuizh gant e samm ?

Daoust hag oc'h douar hon tadoù, stag omp gant ur
[chadenn ?

Ha bezañ 'vefemp eta evel ar gevidenn
A welomp a-istribilh hep gwelout he neudenn ?

Pe daoust hag hor c'halon 'vez evel ar grogenn-vor
A zalc'h atav en he c'hreiz trouz an tarzhoù a dorr ?
Rin hag a chomo kuzhet, rin kalon tud Arvor !

Ya ! e goueled hor c'halon hor Breizh a gan atav
– Mouezh an douar ha mouezh ar mor – hag he c'han
[zo ken brav
Ma n'omp ket evit mirout oc'h e selaou pa sav !

Breizh-Izel, douar va zadoù, bro an tourioù mein rous,
An danevelloù dispar hag al lannoù didrouz,
Bro ar c'hoefoù gwenn ha glan, bro an tokoù boulouz !

O Breizh-Izel, yaouank bepred, daoust dit da vezañ
[kozh ;

Meur a wech evel hiziv dirak ar mor a groz
'M eus soñjet ennout pell-pell ken a gouezhe an noz.